

# Pobl Vreizh

4<sup>L</sup>

Ebrel 1981 - niv. 132



Poent eo kass hemañ da sotal brulu pelloc'h !  
Amzer awalc'h en do e-gis-se da c'hoari gant e gozh akordeoñ.  
Ahendall, ma 'z e-barzh, e chomo seizh vloaz all d'ober e roue ba  
penn ar Frañs. Nann ! Trawalc'h bremañ. Re zo re !

**HARPIT  
POBL VREIZH**  
KRP 2746-79 ROAZON  
CCP RENNES

9<sup>e</sup> listennad

A. Fopars, Kanada	35,00
P. Fourel, Brest	30,00
B. Cadoret, Toulouse (31)	20,00
Y. Jardin, Douarnenez	20,00
J. Benoit, An Arvor-Traezhem	60,00
R. Noel, Bar s/Seine (10)	10,00
M. Le Roy, Ar Gelveneg	20,00
Y. Pleiber, Plabenneg	20,00
D. Allain, An Oriant	60,00
P. Jacq, Brieg	60,00
L. Le Doze, Naoned	20,00
M.L. S., Pacé	10,00
M. Catherine, Naoned	30,00
N. Peyr, Nîmes (30)	30,00
L. Cleac'h, Kemper	60,00
R. Nedelec, Pont n'Abad	20,00
L. Bodivit, Fouenant	20,00
D. L.C., Ar Gemene	10,00
<b>575,00</b>	
Divar al listennadoù all	<b>4540,00</b>
War-un-dro	<b>5115,00</b>

war he zro. Ur c'helaouenner a vicher, paeet gant ar gelaouenn, zo o tont war sikour ewid bessaad o labour d'ar re a ra wardro LE PEUPLE BRETON. Gwir eo ez eo sammet bras hor c'harnarded a vez o lakaad kelaouenn c'h'alleg an UDB da zont er-maes beb mis. Ouzhpenn kement-se ez eus diw bajennad ha tregont a vont d'ober LE PEUPLE BRETON bewech. Amañ ganeomp n'eus nemed daou-zeg pajennad traou.

Chañs he deus eta ar gelaouenn LE PEUPLE BRETON, ha gweli-a-se ewiti. Ewid POBL VREIZH avad, n'eus ket hanw eus ur c'helaouenner a vicher da zont war sikour. Setu e vo red d'an dornadig tud a laka POBL VREIZH da zont er-maes beb mis delc'her da labourad, a laz-korf alies, ma n'eus gavo prest POBL VREIZH mis goude mis. A-bann ma vez achu gant un niverenn, goude ma ne vez ket sec'h c'hoazh al liw a vez bet lakaet d'henn moullañ, e vez red sourial eus an niverenn da zont. Red e vez torriñ o Tenn d'ar re a zo gouest da skrivañ — memes ma laront n'int ket barreg —, ewid o lakaad da zuañ un tamm paper bennag e brezhoneg. Lod a oar laread en eneb n'int ket ewid sevel pennadoù politikel e « vech kozh hon tadoù ». A c'hell bezañ. Mes kement heni a skriv e brezhoneg, pe romanjou pe varzhonegoù pe bennadoù politikel, e

vez bet red dezañ en em varrekaad tamm-ha-tamm. Diwargoust ober meur a farienn. Fabricando lit faber, a lavare ar Romaned; penaos e lavare ar Gelled, ne ouier ket re vad; bez' e c'heller troiñ: « Dre forzh gwellañ e teure da vezañ gov » (beroc'h eo al latin !). Bec'h d'ar pluennoù neuse, brezhonegerion lenneg, ar re gozh koude hag ar vevouank ! Hag, ne bado POBL VREIZH nemed gant labour an oll: ra gemer peb heni e lod, hag e vo skañvoc'h ar zamm war choug an nebeudig tud hag, e vez oc'h ober wardro POBL VREIZH, hag i gwall vec'hiet alies.

Ha ma n'oc'h ket ewid skrivañ e brezhoneg, dalc'hit da vihanmañ da gass ho kwennien: marc hamatoc'h-a-se e vo peb niverenn eus POBL VREIZH. Trugarez vras.

POBL VREIZH

**RADIO - U.D.B.**  
Tel. (16.98) 80.18.47

Dont a ra ho kwennien brawig, lennerion ha komanterion ger. N'eo ket druz-druz ar peuriñ, med n'eo ket disec'het ar prad kennebeud. Fiziañs hon eus, pa vo achu ar roll-mañ (a-benn tri mis ahann), ho pa kaset da bi-POBL VREIZH talvoudegezh UN niverenn d'an nebeutañ. TRUGAREZ VRAS eta d'an oll brofrouion.

Ema hor c'hoazh goshañ, LE PEUPLE BRETON, o vont da gaoud ur vatezh vras, pe ur mewel bras kentoc'h, d'ober

**TI-KRAMPOUEZH  
SNACK**

**Billig Biboad**

Krampouezh - Sistr - Chouchen  
Kig ha farz ha soubañ d'ar gwener  
65, r. Commandant-Drogou Kerinou 29200 Brest

**E-KREIS RENKENNADOÙ  
KERMARIO E KARNAG**

50 Artisan eus Breizh a tiskouez o labourioù bandez eus 10<sup>e</sup> mitit da 10<sup>e</sup> nos

Palou Gwidreder Lev Gouarnamant. Mestr-baerrez  
Hanno gwener Lincoulz. Sotr Abardallenn  
Brawigoù Gwer odoonet. Kizallerzh Krec'hin

**KOMANANTOÙ**

P	boutin : 40 L	V
O	skoaz : 60 L	R
B	pe ouzhpenn	E
L	KRP ROAZON	I
	2746-79	Z
	C.C.P. RENNES	H

Ti-Moullerezh « Iroise »  
29200 Brest  
Rener ar gelaouenn  
Fañch Morvanou C.P.P.A. 50 091  
1500 skwerenn

Komanant d'ar gelaouenn bolitikel nemei e brezhoneg penn-da-benn

**Pobl Vreizh** (service abonnements \*)  
BP 304 - 29273 BREST-CEDEX

Hanw hag hanw-badez

Chomlec'h

a gass e gomanant  
Boutin : 40 L (1)  
Skoaz : 60 L pe ouzhpenn (1)  
Estrenvro : 60 L (1)

Amañ an arc'hant  
dre c'hokenn-bost (1)  
dre vandat-lizher (1)  
dre c'hokenn-vank (1)  
CCP RENNES 2746-79

(1) Diverzh ar gerioù na servijont ket

**REKOUROMP SKOLIOÙ  
KREIS BREIZH !**

Pa serr ar skol e varv ar vro. N'eus ket med mont da weled bar bourkou lec'h n'eus skol ebet ken, evel deus tu Kallag, an Uhelgoad pe Rostren. N'eus ket med kompren iwe peged disterraet eo ar c'hèrioù pe ar bourkou nevez serret ar skolioù eme : Mael-Karaes ha kent, Poultaouen hag ar Foulhez. Ha bewech e vez serret skol pe skolah, n'eo ket ar vugale hebbén a rank mont hirroc'h da glask deskadurezh, n'eo ket hebbén o skolaerien ha skolaered, med toud al labourerien all a ra wardro buhez ur skol (kegerien, mitizhien, merourien hag all).

Skolachoù all zo prest da vont da heul ar re-mañ diwezhañ : re Spied ha Landelo emar o klask mougañ anehe ur pennadig so dija, ha heni an Uhelgoad n'ema ket pell warlerc'h ba spered aotronead an Akademi. Gwir eo eh a war nebeutaad ar vugale, med ouzhpenn an dra-se a zo. Skolach Landelo eo krog niver ar vugale da gresskiñ 'barzh emi... Skolach an Uhelgoad en deus kollet daou vugel en ur ober tri bloaz, med ma teu ar pennoù bras a-benn deus o zaol e vo bet lamet tri c'hlass ha tri skolar kehid-se !

Petra ha piw zo kaos, ma n'eo ket ar Ministr hag ar gouarnamant hag a glask espern arc'hant diwargoust ar Deskadurezh hag ar vugale, ewid reiñ d'ar soudarded ha d'ar kapitalisted, mechañs... Urzh en deus ar rektur da grenañ e zispignioù, ha peogwir en deus ezomm un toulladig skolaerien ba Bro Roazon, petra en deus kavet gwelloc'h med lemel postoù ba Kreis Breizh (ha ba Penn ar Bed hag Aochou an Hanternoz dre vras) ; ha degass anehe d'ar gêr vras.

Lise Karaes zo tizhet iwe. Biskoazh kemendall, ba ur gêr a zalc'h da gresskiñ (tremenet he deus an 10 000 a dud), a zo pell deus ar skolioù all (hanterkant kilometr) e faot d'ar rektur dilemel PEWAR skolar ar bloaz a zeu (unan ewid deg). Soñjal a ra dehañ n'eus ket trawalc'h a vugale ba peb klass, ha re a choas « opsiouñ » ! « Ne faot ket deoc'h soñjal kaoud kement a filmou sinema ba Karaes ha ba Roazon », a lar ar savantenn-se o klask ober fent. Ur vech !

A-benn mis Gwengolo e vo adframmet an eil klass, hag an dra-se zo gouest da aessaad o labour distruj : e-lec'h e oa beteg bremañ eil klassoù A, AB ha C, ne vo ket med klassoù heñvel, ha soñj rektur Akademi Breizh eo choukañ pemp krouardur ha tregont ba peb heni deus ar c'hlassoù

newez-se. Evel gwehall, ba klass ar « santifikad » !

Un taol fall eo an adkempenn-se ewid al liseoù bihan, hag ouzhpenn heni Karaes a vo tapet moarvad. Muioc'h a vugale ba klassoù heñvel, ha muioc'h a labour ewid ar skolaerien muioc'h a boan ewid darn deus ar vugale, setu ar pezh en em gavo sur awalc'h. Aessoc'h a-se vo kass kuit deus al liseoù ar c'hros vrasañ deus ar vugale, ha dibab ar re wellañ ah ay da studieren goude-se.

Ar gwañhañ tra a zo, evel ewid an tren hag ar servijioù publik toud, sed ase tud bar burevioù, ba Kemper, ba Roazon (ma n'eo ket ba Paris) o c'hoari gant ar sifroù o tont maes genou o urzhiataer pe ordinateur, heb gouid, heb klask goude penaos e vevomp ni war ar plass, ha petra hon eus ezomm. Tud ha n'int ket deus ar vro, tud ha na raont ket forzh deus ar vro, tud ha n'int ket gwall vraw da weled.

Tri skoilh zo o harzañ skolioù Kreis Breizh, ha poniañ a raomp da gass anehe diwar hent :

- ar « grilles » pe gloeju (?) a zo niver red ar vugale ewid delc'her pe digoriñ ur c'hlass, hag a servij koulz bar c'hèrioù bras ha war ar maes,
- ar « gartenn skol » ah a da heul an departamanchoù hag a zisparti

Karaes deus Kallag, Rostrenen, Gourin a zo he bro naturel.

— ar c'hlassoù teknikel T, ha n'eus ket anehe ba Karaes, hag a sach beb bloaz hanterkant krouardur da nebeutañ da Kemper, Brest, St-Brieg...

Ur stourm zo bet lañset war an traou se, ba peb skol da gomañs, hag etre oll skolioù, skolachoù ha liseoù Kreis Breizh a-benn bremañ. Ur bern traou zo bet gwraet dija : manifestiñ ha mont da weled pennoù bras Kemper ha Roazon, assambles gant skolioù all (evel heni Lanmeur, a zo tizhet iwe), bodañ tud ar vugale meur a wech ewid gouid klaskou nevez teknikel, lakad bodañ kusulioù kêr Karaes hag an Uhelgoad war an afer-se, ober manifestadeg, ban Uhelgoad ha Karaes iwe, gant ar sindikajoù labourerien, peisanted ha tud ar barres.

Tud a viss fall hon eus diragomp, koulz ba Kemper ha ba Roazon, med ni zo pennoù kaled mat iwe. Hag ar gwir zo ganeomp : dleet eo reiñ d'an oll ar moian da vevañ ha da studiañ ba e vro. Rekouriñ hon skolioù zo rekouriñ hon bro : ma leskomp ar re-mañ da wervel, e leskomp anehi da zisac'hañ ha da gouzrañ.

Frañsis Favereau



# MOUEZH AN UDB E SELL EUS BOTADEG

Pennad-kaos gant Herri Gourmelen e karg eus aferioù diavaes an UDB

**Pobl Vreizh** : Ahanta, Herri, lâret he deus an UDB kenavo d'an tu kleiz ?

**Herri Gourmelen** : N'he deus ket daonet 'vad I Delc'her a ra re an UDB da vezañ ken « Kleiz ha Breizh » ha biskoazh. Klask a ra an unvaniezh, dalc'hmad war an tu kleiz. Vreizh eus an unvaniezh-se, pa weler ar pezh o deus gwraet Giscard hag e re gant ekonomiezh Vreizh.

En tier-kêr m'ema an UDB assambles gant ar PCF hag ar PS, e talc'h hor strollad da program an tu kleiz, evel m'eo bet savet pepar bloaz zo bremañ. Lakaad a raomp er penn kentañ interest jeneral an tu kleiz, ha n'eo ket interest hor strollad-ni, hag ewid kement-se n'hon devez eveljust merk a anaoudegezh vad ebed a-berzh an daou strollad all.

Daoust hag-ehv ez eo troiñ kein d'an tu kleiz chom heb kemer perzh e-barzh tabutoù ar bennrenerien barisian anezhañ ? Ar c'hontrol an heni eo : dre m'emaomp a-du gant an unvaniezh eo ne fell ket deomp ledannaad c'hoazh tachenn an disunvaniezh.

Abaoe mis Gwengolo diwezañ hon eus ni amañ e Breizh stourmet e meur a zoare a-eneb da Giscard. Klasket hon eus gwelad tud all dont da zifenn int-i iwe labourerien Vreizh, da skwer p' hon eus kenniget d'ar PS ha d'ar PCF ober ur c'hrogad assambles war dachenn ar plessou-labour e Brest. Chomet eo mud ar strolladoù-se. Daoust hag-ehv e vefent dinedh-kêr ouzh interestoù labourerien Vreizh ?

**Pobl Vreizh** : Aet eo d'an traoñ ar projet da lakaad war ar renk un danvez-kannad o komz en hanw ar Vro C'hwec'hkogn ? Daoust ha n'eo ket krieg an UDB, ewid ul lodenn, e-barzh ar c'hwitadenn-se ?

**Herri Gourmelen** : Red eo, araog peb tra, tamall garw lesenn ar presidañsialed. Kent, da vare ar votadeg ewid Kusul an Europ, an arc'hant eo hag a oa oc'h ober an disparti, e-toues ar re a oa o klask mont war ar renk, etre ar gandidated « sirus », hag ar re all. En dro-mañ, ez eo lesenn ar 500 sinatur. Ul lesenn savet a-eneb d'an emrenerien eo, hag a-grenn : 500 sinatur, ya, med strewet war 30



Herri Gourmelen

(departamant d'an nebeutañ ha pas en tu all da 50 sinatur e neb departamant.)

An UDB eo he doa kenniget lakaad da vont war ar renk un danvez-kannad o talvezoud ewid pobloù gwasket ar Vro C'hwec'hkogn. Ase 'ma he c'hirieghez !

Ouzhpenn-se, n'eo ket bet interest gant hor c'hennigadenn strolladoù emrener an DOM-TOM — bez o deus, gwir eo, o c'hudennoù o hunan. Gant VVAP (volem viure al pais) ne oa ket splann an emglew war beb tra kennebeud. Setu o deus c'hwitet an traoù, ya. Mes ni amañ e Breizh hon eus pouezet war ar stourmad a eneberezh ouzh Giscard.

**Pobl Vreizh** : Perag neuse, en dro gentañ, nompas lâred d'ar Vretoned votiñ ewid Mitterrand, hag a seblant prest da roiñ koad da Giscard ha d'henn lakaad diæs en eil tro, pe ewid Marchais hag a gennig ur program o troiñ kein d'ar c'hapitalism ?

**Herri Gourmelen** : Dalc'hmad e vez ar memes rimodell gant re an tu kleiz gall : en dro gentañ, peb heni

ewitañ e hunan. Da lavared eo, er c'hontrol eus stad an traoù e 1974, e vo meur a gandidat ewid an tu kleiz. Peadra da lakaad ar Vretoned, ar re yaouank dreistoll, da vezañ heuet gant ar politik.

Ahendall, perag choas, peogwir n'eus heni peurvad ebed e gwirionez ? Nag ar PS nag ar PCF n'o deus anzavet ez eus eus pobl Vreizh. Ne vez klewet hanw eus rannvroelañ nemed da vare ar botadegoù. Tra souezhus, ewid Rocard, Marchais pe Mauroy, e chom kudenn Vreizh unan dister, e-kichen heni Okstania, Korsika pe Euskadi. Goulennet e vez ar « frankis da c'hortos » ewid toullbac'hidi Korsika araog o barnedigezh, mad kêr ; prometet e vez ur statud ispisial ewid Korsika, mad tre ; kaset 'vez ul lizher digor d'an Okstania, gwelloc'h-gwellañ ; komz 'vez gwraet eus sevel un departamant euskarad, mad ar jeu adarre ! Med, diwarbenn Breizh, na pegen laosk eo pennrenerien ar strolladoù gall eus an tu kleiz ! Hanw ebed ganto da adstagañ d'ouzh Breizh departamant Naoned ; hanw ebed eus ar mennad « distaliadeg » kenniget gant an UDB ; hanw ebed eus strivù an Talbenn Sewenadurel, pe neuse e vezont « adkemeret ». Ha pegen amestr ar PS gant un den evel Charles Josselin o vont da bales an Elysée assambles gant aotrouien Vreizh a ouenn vad. Hag ar PCF, pegen braw ha pegen buan en deus chañchet tu d'e chupenn diwarbenn Plogoñv hag an nukleel.

**Pobl Vreizh** : Ha koulskoude, daoust ha ne vije ket bet gallet gerwel ar Vretoned da votiñ « war an tu kleiz », heb lâred muioc'h ? Kement-se 'oa bet gwraet, kent, da geñver botadegoù ma oa bet harzet an UDB iwe...

**Herri Gourmelen** : Klasket hon eus protestiñ ouzh an disunvaniezh etre re an tu kleiz, un disunvaniezh degasset deomp, hag a eneb deomp, deus Paris. Med henn em bannet hon eus a vouezh uhel, ewid an eil tro, e c'hallwint ar Vretoned da votiñ ewid kandidad an tu kleiz ar gwellañ plassen da chom war ar renk, forzh pehini e ve.

Med ma 'z eo fallag al lesenn, ul lesenn savet a-razozh kêr hag ez

# AR «PRESIDAÑSIALED»

omp harzet ganti, ne laka ket diaes tamm ebed hor c'hanfarded eus an tu kleiz gall. Fellet eo bet deomp iwe huchal a-eneb da zoareoù «bandenn ar pepar », m'eo breinet ganto, nullet zoken, ar jeu demokratel. Heb kentañ an « urzhioù » roet d'ar re e karg gant o strolladoù, hag i eus an tu kleiz : chom heb roiñ sinatur ebed da zanvez-presidant ur strollad « bihan ». Dalc'homp soñj iwe e oa bet red deomp iwe kaoud 10 000 sinatur e 1977 ewid bezañ gwelet ha klewet war skramm FR3 Paris.

A-benn ar fin, e-lec'h bezañ kemeret evel tud o vennigañ dalc'hmad re an tu kleiz gall, forzh pegen divalaw e raont, en dro-mañ e tigoromp bras dro an emreneriezh e-barzh ar Stad-mañ.

**Pobl Vreizh** : Hag ar PSU ? Hag an ekolojisted ?

**Herri Gourmelen** : Bez ez eus ur perzh dioutañ e hunan gant hor pobloù, ez ez int koloniset. Red neuse delc'her ar brassañ kont eus ar perzh-se ewid ar c'handidat hon defe da harpañ. N'eo ket un dra koloniset. Stourm ar merc'hed, kudenn an ekoloji zo stourmoù ha kudennoù e-toues reoù all. Amañ ez eo ur stourm hag ur gudenn o tatum hag o kendastum an oil stourmoù-se. Gwir eo ez eus gant ar PSU meur a boent politikel ez omp laouen ganto : an nukleel sivil ha soudardel, ar c'hultur, h.a. Med gant un dra all a-boues eo omp lakaet nec'het : gred entanet PSU Breizh o lâred ema e-barzh an « emsav breizheg » ; ewid an UDB n'he deus biskoazh klasket bezañ eus an

« emsav », hag ez eus e-toues re an « emsav » ouzhpenn unan hag a zo a-eneb krenn d'an UDB.

Ewid paotred ha merc'hed an ekoloji, hon eus diskuliet meur a wech o c'hoant da sachañ war o zu nac'hadenn vras tud Plogoñv, hag ar re sklaerañ, daoust ma n'eo ket just lakaad an oil ekolojisted e-barzh paner an tu dehoù.

**Pobl Vreizh** : Assantiñ a ra an UDB neuse chom mud ha divouezh en un degouez a-boues e-barzh politikerezh ar Frañs hag heni Breizh ?

**Herri Gourmelen** : Ur wech c'hoazh, piw zo bet gwelet war an dachenn, abaoe mis Gwengolo, pa oa hanw eus Breizh hag eus he c'hudennoù ? Pa oa kistion da zifenn Kreis-Breizh, da zifenn an hent-houarn e Breizh, da zifenn al labour e Breizh, ar c'hultur e Breizh, da enebiñ d'ouzh an nukleel sivil ha soudardel. En diavaes eus tud an UDB, ne oant ket stank, re ar strolladoù all.

Ar stourm a-eneb d'ar vuhez ker, a-eneb d'ar mod nevez kavet gant ar kapitalisted da gempenn o jeu, da greskiñ o frofid ha da Goulonderiñ Breizh, ar stourm-se omp bet ni hon unan, pedost, o ren anezhañ.

Kliewet eo bet mouezh an UDB gant ar Vretoned, daoust m'emaer o klask min-waskañ ahanomp. Eveljust ez eo ar Presidañsialed ur mare bras e-diabarzh buhez politikel Breizh, mes ewidomp-ni e kont muioc'h c'hoazh stourm dalc'hmad ewid roiñ d'hor pobl he frankisou politikel ha sossial, hec'h emreneriezh eta ; setu ase pal kentañ an UDB, arabad henn ankouad.

# 4% EWID AN UDB BA KANTON BRIEG

Epad pell eo bet **P. Stephan**, maer Brieg, kusulier jeneral ewid ar c'hanton-se iwe. Goude ma oa aet **P. Stephan** da Anaoz nevez so, e oa goullio e gador ha kusul an departamant. Red 'eta kaoud ur c'hustulier nevez. Pemp parrez zo ha kanton Brieg : Brieg, Eder, Landevenez, Langolen ha Landudal. En dro gentañ, hag ewid ar wech kentañ bar c'hanton-se e oa aet an UDB war ar renk. **Herve Latimier**, o chom e Landevenez, esel eus Burew Politikel an UDB, eo a oa o tougen bannet ar strollad. Bez ez eo **Herve Latimier** sekretour meur Akademezh e Kemper. Ur c'hanton douget mad d'an tu dehoù eo heni Brieg, rag, pa voe gwraet ar gont e fin an dro gentañ, e voe gwelad penaos ne oa aet nemet 21,7% gant an tu kleiz (PS : 14,2%, PCF : 3,7%, UDB : 4%). En eil tro swad ez eus bet aet 25,19% eus ar mouezhoù war bann an heni nemetañ eus re an tu kleiz chomet war ar renk.

Ewid dont en-dro war an dro gentañ neuse, ez eo bet digoret an erw gant an UDB e kanton Brieg en un doare n'eo ket lu tamm ebed. 201 a vouezhoù aet war hanw kandidad hag ar sokialouriezh ewid Breizh, se n'eo ket divalaw tamm ebed. Pa soñj ez eo c'hoazh ar ger « emrener » heñvelter eus « Bezen Perrot », hag ar ger « sokialour » heñvelter eus « Goulag ». Ha kement ha lâred an traoù beteg penn memestra, gant 4% eus ar mouezhoù, eo bet **Herve Latimier** araog kandidad ar PCF.

En desped da gement a vez gwrzet, e Paris hag er Frañs a-bezh, ewid mogañ mouezh ar strolladoù «bihan», ha dreistoll ewid gwaskañ war ar c'hoant-emreneriezh chomet bew e don ar c'halonoù, e tiskouez ar Vretoned ez eo an emreneriezh ar pal a ranko bezañ tizhet dez pa vez ewid ma chomo bew o bro.

Komanantit da gelaouenn c'haleg an UDB

**Le Peuple Breton** (service abonnements \*)

BP 304 - 29273 BREST-CEDEX

Hanw hag hanw-badez .....

Chomlec'h .....

Boutin : 50 L (1)  
Skoaz : 70 L (1)  
Estrenvro : 60 L (1)

Amañ an arc'hant dre chekenn-bost (1) dre vandat-lizher (1) dre chekenn-vank (1) CCP RENNES 2365-76

(1) Divarke ar gentañ na servijont ket



## LAENNEG MEDISSIN BREIZHEG

bet studiet dreistoll, an tuberkulos da gentañ penn.

Kriz awalc'h oa, kredapl d'ar mare-se anavoud ar c'hleñved heb gelloud dont a-benn dioutañ. Dres heñvel ouzh ar c'hri-gir-deu en deweiz hiziv.

Araog e amzer e oa Laenneg. Ha stard eo bet e vuhez. Berr an arc'hant gantañ, vec'hed dister, disurz er familh, tud avius ha fallag en dro dezañ. Peadra awalc'h da falgalonih ha da zisternañ. Ha padal, e talc'has penn ouz kement diaesamant. Penn kaled breton ha kalon dener, chomet karantezus ouzh an oll.

Ar binwidigezh, ar c'hloar hag ar vrud, an enoriou bras ? Traou dister ! ne c'hell ket kalon an den kavout he gwalc'h ganto.

**BUHEZ LAENNEG-DRE VRAS**  
(KEMPER 1781 - FLOARE 1826)

**gved a vis C'hwevrer 1781** - Genel a ra Rene-Teofil-Hassent Laenneg e Kemper, en ur familh a renk uhel. E dad kozh, genidik a Zouarnes, zo bet maer e Kemper ha kannad da Vreizh Breizh. E dad zo letanant en Amiraliezh, kentoc'h ur Yanneg-vil-licher ha ne sousti ket kalz ouzh e dud, nemet sachañ die war o c'hein da digorñ prosesoù dezo.

**1786** - Mervel a ra e vamm. Kemeret eo da sevel, e presbital Elien, gant e eontr beleg, epad ur bloaz.

**1788** - Mont a ra gant e vreur Michaud da chom da Naoned, e ti un eontr all. Gwilhoù, breuz d'e dad. Medissin brudet eo heñañ. Bountañ a raio e nizi yaouank war-uz ar medissinerezh, douetus bras.

**1792** - Ema an Dispac'h Bras o'h ober e reus e Naoned. Breset zo etre ar Chouanted (Charrette) hag ar Republikaned. Dibennañ ha lazañ a raer kalz a dud e kêr. Renet eo ar Spont Bras eno gant Karlher-argwadeg, eus Konvansion ar Jakobined. E-kreis an disurzhoù-se eo e ra Laenneg bilan e gresk. E eontr zo a-eneb ar relijion hag ar veleien, heb bezañ a-du gant paotred ar Spont.

**1795** - Krogñ a ra gant e studi-vedisin e Naoned.

**1801** - Mont da ra da Baris da beurachuñ e studi. Kreisennet eo an Deskadurezh abaoe ar Reveulzi. Ret mont da Baris hivisiken da zastum gouiziegezh. Krogñ a ra da zeskiñ gant Corvisard ha Dupuytren, daou vedissin brudet. Stummañ a ra e spered ganto. Emaer o'h ober ur skiant ressis ha sirius eus ar medissinerezh.

Wardro ar mareoù-se iwe, eh en em dro da vad ouzh ar Feiz. Chom a raio devot-kenañ ahann d'ar marw. Alies eh implijo lousoù ar feiz gant e re glañv.

Studial stard ha labourad a-lazh-korf. Er c'hentstrivadegoù hag armoennou e teu ar maout gantañ. Kavadennoù a ra an anatomiezh ha klenvejoù. Embann a ra studiadennoù ha sevel kentelioù medissinerezh araog bezañ medissin zoken.

**1804** - Tremena a ra e desenn-vedissinerezh diwarbenn Hipokrates, medissin meur an amzer gozh. Setu enñ doktor-medissin. 23 n'eo ken ! Stagañ ra da labourad e kêr Baris. Deredeg a ra ar re glañv d'e gavad.

En em lakaad a ra da addeskiñ brezhoneg, a ouie es-vihan, 'toare. Krogñ



a ra da skrivañ e brezhoneg. Dont a raio da vezañ barreg war hor yezh. Diwezatoch e studio kembraeg iwe. Darempredañ a raio Ar Gonideg. Troet bras eo iwe gant sonerezh hag ar c'hanouennou-pobl. C'hoari a ra fleut.

**1809** - Trubuilhoù-familh. Proseses etre e dad hag e vreur. Dont a ra da vezañ medissin gant ar c'harinal ren e vuhez war an ton bras hep kaout danvez !

**1810** - Mervel a ra e vreur gant an tuberkulos. Kalz a dud eus ar familh zo marvet dija ha kalz re all a varwo c'hoazh diwar e goust.

**GOUANWEZH 1812-1813** - Bresetioù Napoleon kozh a laka ar gwad da ruilh war Europa. Klenvejoù-red ha maonegezh zo o tebrñ Bro-C'hall. O c'hoari c'hlañv em a dare Laenneg. Pell zo em a gant ar c'hleñved ennañ ivez. Un tamm diskrog e vez heb an amzer evelato.

**1814** - Leun eo ospitalioù Paris gant soudarded gloaset ha klañv. Ober a ra Laenneg wardro ar Vretoned ha komz brezhoneg outo.

**4-4-1814** - Diskaret Napoleon kozh. Dont a ra Laenneg da ziskuitañ da Vreizh. Kempenn a ra maner Kerlouarnezeg e Ploare hag a zo chomet dezañ. Jardiñañ, labourad ar c'hoad, klask disec'h paludoù a ra. Distroñ a ra da Baris.

**1816** - Hanwet eo da vest-medissin en ospital Necker. Gelloud a ra studial ar pezh a blij dezañ : klenvejoù ar beulñir.

**1817** - Ijinañ a ra ar stetoskop, ur benveg da seloa diabarzh ar c'horf. Turgnañ a ra ar re gentañ anezañ e-unan. Ur gormez eeun ha kleuz eo ar stumm kentañ anezañ. Chañc'a raio kalz araog dont da vezañ e-gis m'ema bremañ ete daouarn ar vedissined. Gant ar stetos-

kop-se, e'hell anavoud kalz gwelloc'h ar c'hleñvedoù ha kavoud klenvejoù newez. Kendalc'her a ra da zispenn ar c'horfoù marw, euid klevet ar war an den bew. « Metod anatomiklik » a vez graet eus an doare skiant se.

**1819** - Embann a ra ul levr a boues bras : « De l'auscultation médiate ou traité de diagnostic des maladies de cœur et des pommous... ». Levr-diaez ar medissinerezh modern e vo al levr-se epad pell, hag hiziv c'hoazh e chom gwir ar pezh zo skrivet ennañ. Eno em a oll draou en deus Laenneg disolc'et epad e vuhez, dreistoll diwarbenn klenvejoù ar skevent.

Kerkent hag embannet e levr e teu Laenneg da Vreizh, da ehanañ. E Paris, emae o'h ober goap, gant o genouioù faets. Aet ar vrud dioutañ dre ar bed oll, ha, pa teu ar vrud-se endro betek Paris e taolant muioc'h e eweiz ouzh Laenneg. Klask zo warnañ, leun a vedissined estren zo klañv, defot dont d'ar skol gantañ.


**1821** - Erru eo end-ro e Paris. Bremañ vad e raer stad ha ton dezañ forzh pegement. Medalennoù, kargoù hag enorioù a gouez war e chouk, puilh ha stank. Medissin eo en ospital ar « Charité ».

Studial a ra an tuberkulos er bloavezhioù diwezañ. Kelennet eo iwe. A-drugerezh dezañ eh anavezet mad an tuberkulos diwar neuse. Ne vo kavet lousou dioutañ e 1944 nemedekñ, siwazh.

**1824** - Fortunañ a ra gant un intañves, kar dezañ.

**1826** - Adembann a ra e levr meur. Gwall glañv eo gant an tuberkulos. Degasset eo da Vreizh d'ober e daladroù. Mont a ra da Anaon d'an 13 a vis Eost 1826. 45 n'eo kén. Beziat eo e bered Ploare.

**Gouc'h-an Kervella**



## DESKIÑ BREZHONEG...

Bemdez e vez klevet er radio pe en tele genou avel « province », « régions », ha dreistoll « Paris ». Bez' ez eo Paris, war gemant tachenñ a zo, ar skwer nemet, o tiskouez ar pezh a zo a-zoare hag ar pezh n'eo ket. Gant ar cholon bras a glewer ar mareoù-mañ p'ema botadeg mis Ebrel o tostaad, an heni da zilenn ur presdant newez, ez eo Paris, gwashoc'h eged biskoazh, an tourtan nemetan a sklerjenañ terwaljenn ar « provinsoù ». Dont a raont betek Breizh, eta, dont a ra pennoù bras Paris da lavared d'ar Vretoned, a beb eil « Votit ewidon, ha pa vin rener ar Frañs, eus Paris e roin deoc'h kement ha m'ho peus ezomm, hag e viot disammet eus hoc'h oll gudennou ».

Ataw hag ewid ar wech, ma zud vad, ez eo e Paris an heni a vez kavet an diskoulm d'ar c'hudennou, da gemt kudem a vez.

Goulskoude, barreg eo ar Vretoned, ma vezont laosket d'ober, da gaud int-i o hunan ar mod da ziskoulm int-i o hunan o c'hudennou.

Setu perak, herzel ouzh Giscard a dalvez araog heb tra kement ha stourm ewid kemer stur hor-bag-ni.

N'eus ket c'hoazh e-leizh a Vretoned o sevel o fenn, c'hoant dezo ober un dra bennag ewid ar vammvro. E Paris avad, n'eus c'hoant all ebet e-mesk tud gouarnamant ar Vretoned, ober gante tud sentus, boutin, savet diwar ar patrom « Français moyen »...

Med ni, e-gis Bretoned, ne fell ket deomp mervel ; ne fell ket deomp mont da get evel pobl, na bewañ evel tud kollet ganto an envor eus o c'henbersonelezh. Ne fell ket deomp dont da vezañ tud estren en hor bro, heñvel, siwazh, ouzh an oll re a vez gwelot e labourad evel sklavet e-barzh keniou bras an Europ pe an Amerik, kollet ganto o yezh, o envor, o mammvro...

Setu perak ez eo red ober gant ar brezhoneg er vro-man, rag bez ez eo ar yezh un arm politikel, un dihuner a-fesson ewid tennañ tud hor bro eus o c'houk ponner. Gant ar brezhoneg e vezer gwiziennet donno-c'h e-barzh douar Breizh. Gant ar galloaeg e c'heller ober kemmañ e Breizh-Uhel. Gant yezhoù ar vro e c'heller herzel ouzh loudourien gouarnamant ar Frañs.

Ewidon-ne m'us dibabet mont gant an hent-se. Ha c'hwi ?

M.T. Laot

# KRONIKENN

## AR SKIANTOÙ

### Amazonia en arvar

Epäad ar bloawezhioù tremenet ez eus bet komzet kalz diwarbenn an adloc'hennañ e Breizh, diwarbenn ar chañchamanchoù en deus degaset en lec'hioù zo d'ar c'hempoues ekologel : an douarou krignet dre nerzh an avel ha dre beradur an dour glaw, an dic'hiannoù n'eus ket kehid-se c'hoazh en Montroules hag en Kemper.

Chañchomp bro, ha kontinant memes, ewid degouezod e Sud-Amerika. War an douar-se e kaver brassañ forest trovanel a zo er bed, Amazonia e hanw. Pw n'en deus ket hunvreet epad e yaouankis en ur lenn an avanturioù marzhus ha kevrinus bet en gam evet er rann-dise ? An ifern glas... Herwez ur studiaden e vefe en riskl bras ar c'hoad meur-se, deg gwech ec'hon evel ar Frañs, ha tachad ar stêr Amazon en e bezh : troc'het e vez re a vez. En o studiaden diasezet war fedoù sur m' o deus sellet pizh oute, e klask daou spessialist, an Amerikan A.H. Gentry hag ar Peruvian J. Lopez Parodi, henn proufiñ...

Merzet o deus chañchamanchoù a-boues ekerz an deg vloaz tremenet, ewid pezh a sell kreskadennoù dour ar stêr Amazon en he rann uhellañ, ressisoc'h en Bro-Perou. A-viskoazh, evel an oll stêrioù trovanel, he deus bet an Amazon kreskadennoù dour epad ar seson c'hwlleb, med ar pezh a c'hoarvez bremañ eo e sav kalz uhelloc'h an dour epad ar c'hreskadennoù maximum. Ouzhpenn-se, padoud a ra ar c'hreskadennoù-se kalz hirroc'h amzer, en Bro Brasil dreistoll. Trede tra merzet, bez' e kaver bremañ rinierioù o vont da hesk, rinierioù hag a chome dour enne arag ekerz ar sesonioù sec'h. Merkañ 'ra an daou glasker e oad bet kroget da gentañ da droc'hañ koad en tachad isel ar stêr Amazon. Med abaoe deg vloaz e vezer ouzh henn ober iwe en e zachad uhel, kement ha toullañ henchoù newez a-dreus ar menezioù Andoù, hag enstaliañ trevadennoù tud. Evel-se ez eus bet troc'het ha difraostet 51 000 km²

eus ar forest en Bro-Perou en ur ober deg vloaz, da lavared eo ur wech hanter Breizh.

Neuse, daoust hag-efnv ez eus ul liamm etre an troc'hañ koad-se, ha kreskadennoù diroll ar stêrioù ? Da gentañ oll, o deus Gentry ha Lopez Parodi klasket gouzoud hag-efnv ne vefe ket deuet kement-mañ diwar ar glaw e vefe bet muioc'h anezañ edoug ar bloawezhioù tremenet. Araog 1970 ne save ket an dour uhelloc'h eged 26 metrad en luitos. Goude 1970 ez eo bet savet beb tro dreist da se. Er c'heñver-se, n'eus bet, epad ar mared 1970-1978, nemed un tammig muioc'h a c'hlaw eged epad ar mared 1961-1969. Ar bloawezh 1978 oa bet sec'h toud en Amerika, ha koulskoude e oa bet savet ar greskadenn uhelloc'h eged kreskadennoù ar bloawezhioù gwleb arag 1970.

Herwez an daou glasker enta, ez eo bet deuet live uhel ar c'hreskadennoù diwar chañchamant beradur an doureier liammet gant an troc'hañ-koad divusul en Amazonia. Poent bras eo sevel ur projet diorren ar rann-dise, en ur zeli her kont eus e gempoues ekologel distabil tre. Ma kendalc'h an troc'hañ-koad, kement ha tachad isel an Amazon, kement ha distruj miliadoù a gilometradoù karrez douar-labour. War hir dermen e c'hellfe ur prossessus gouelec'haad krogiñ en rann-dise eus ar c'hontinant sudamerikan. Janglenn Amazonia, an ifern glas, abenn pegehid e vo gwraet an deserzh ruz anezi ?

Y.B. Montreer

#### Gerioùeg

kreskadenn (dour) : crue  
tachad : bassin  
rann-dise : région (géographique)

## PENNAD-

Pobl Vreizh : Ifig Troadeg, te an heni a ra wardro « Kasenn Bro Dreger » ?

Ifig Troadeg : Ya, c'hwec'h mis zo on kroget d'ober se gant tud deus ar vro, deus un tamm partoud.

P.V. : Petra eo se « Kasenn Bro Dreger » ?

I.T. : « Kasenn Bro Dreger » zo ur journal un tamm bihan ispisial, peogwir n'eo ket evel « Ouest-France », an « Tregor » pe an « Télégramme ». Ur journal komzet eo, lec'h vez klewet tud ar vro o kaoseal ba yezh ar vro ha tud o kanañ, perramant o lared beb sort traou : kontadennoù, divinadelloù... ha lakaet 'vez un tamm musik e-barzh iwe ewid ma vije pljus awalc'h da selaoù.

P.V. : Pennas eo deuet da soñj dit ober ur gasetenn ewile, neuse ?

I.T. : Beñ, daou vloaz zo bremañ ez eus bet savet ur strollad e Bro-Dreger hanwet « Dastumerien Bro-Dreger ». E-barzh ar strollad-se e oa un toullad tud yaouank intereset gant ar c'hapaouennoù, c'hoant dehe da zastum kanaouennoù ha beb sort traou all, hag ur bloaz zo bremañ meump soñjet penaos vije red pa vije moian ober ur sort magnetek. N'onn ket penaos vez laret se e brezhoneg, sonskridaoueg pe un dra bennag ewile, da lakaad toud an traou vije bet dastumet e-barzh ar vro, da lakaad toud an traou-se lec'h vefe aezet d'an dud mont da selaoù anehe hag ar magnetek-se zo bet lakaet e Pluned. Dastumet ez eus bet aepure daou-ugent eur kanaouenn, se ra wardro pewar c'hant kanaouenn, ha kontadennoù ha beb sort traou all. Ahendall ez eus wardro deg eur pennadoù kaos pe kaoseadennoù.

P.V. : Gant piw vez gwraet ar gasetenn-mañ hag ewid piw vez gwraet ?

I.T. : E-barzh « Dastumerien Bro-Dreger » e oamp daou pe dri intereset gant se, hag 'meump gwraet ar gasetenn gentañ, sikouret gant Rene Richard, da weled hag-efnv e oa tud all prest da sikour ananomp ha da weled iwe petra vije moian d'ober. Evel-se eo deuet er-maes ar gasetenn gentañ, ha warlerc'h se ez eus deuet tud da weled ananomp, evel Marcelle Quere deus Kawan, Gilles Le Jeune, Steve Hewit deus ar Seizh Sant, tud deus un tamm partoud e-barzh ar vro, tud ha ne oant ket intereset arag-se gant « Dastum ». Ha goude-se, gant an dud se, eo bet gwraet an eil kasetenn. Ha bremañ meump bet un

## KAOS GANT IFIG TROADEG

### Kasetenn Bro-Dreger

tamm arc'hant gant ar gouarnamant, anfin gant « Les crédits S.E.U.C. », emplois d'utilité collective », ewid implijoud unan d'ober ur gasetenn beb mis adaleg bremañ. Ha me an heni a ra-se. « Strollad Dastumerien Bro-Dreger » a ressew 100 000 lur kozh beb mis ewid implijoud ananomp.

P.V. : Ped kasetenn 'peus gwraet beteg bremañ ?

I.T. : Beteg bremañ ez eus bet gwraet teir gasetenn ha 'benn ur mis anan vo gwraet unan all diwarbenn Konfort, Berc'hed ha Mantallot.

P.V. : Pegement vezont gwerzhet ?

I.T. : Beteg bremañ int gwerzhet daou vil lur kozh heb heni. Ahendall, moiañ zo da gomantañ ewid ugent mil lur kozh ar bloaz.

P.V. : Ha pelec'h eo possibl kaoud anehe da bremañ ?

I.T. : Un tamm partoud e-barzh ar vro : Ti Bougeant e Lannuon, er « Seizh-Awel », Konfort-Prad, ti Anañs er Seizh Sant. Adaleg bremañ vo moian kaoud anehe e tisker Kawan hag e konversioù un tamm partoud. Ahendall eo possibl skrivañ din, Ifig Troadeg, Al Lok, Pluned, ewid ar c'homanantou.

P.V. : War bessort korn eus Bro-Dreger 'oc'h o labourad ?



#### AR FALZ

kelaouenn drimisiñ an Emsav diasezet gant Yann Sohier, bodet ennan skolaerion ha kelennerien. Vreizh a-du gant ur skol vreizheg ha laik gwirion.  
Lennit Ar Falz ! Komantant d'Ar Falz !  
140, voad 4 m.  
AR FALZ, Str. Kan Ar Gwez - 29245 PLOURIN MONTRouLES  
KBP 430-20 H. ROAZON

#### AL LIAMM

ar gelaouenn nemet o roañ, 6 gwech ar bloaz barzhonegoù, kontadennoù, pennadoù a beb sort ha keleser 80 pajenn e peb nivrenn - Rener - Ronan Huon  
komantant 50 L - Studieren - 95 L  
Teizorer-merour P. Le Bihan - 16, rue des Fouris-Chaux  
ST. SERVAN 35400 ST. MALO - CCP 5349-06 PARIS

Pennad-kaos dastumet gant Fañch Peru Konfort-Berc'hed.

# Bugale ar startijenn

Deuet eo testenn vrezhoneg levr Chakespeare da vezañ ur vojenn. Seul vuioe'h ez e amzer hebiou, seul belloc'h emañ da weled embannet restenn orin ar Marc'h Orgouilh. Er memes doare ha ne 'm boa ket prennet al levr gallez (a anavezan an danvez anezañ pell 'zo, rag lennet 'm boa anezañ er c'hastellenn hag e brezhoneg, just awalc'h), ne gav ket din, edon o vont da lavared, ez in da weled ar film kennebeud...

Na te 'zo un torr-penn, eme lod din, da betra 'servij bezañ puredur evelse ? Na piv a yafe da weled hennezh, ar film-se, ma vefe e brezhoneg ? Ne vefe ket e vefe rewinet Chakespeare diwar an taol, hag e rankfe gwerzhañ e di bras e Kemper hag e di braw er Forest ? Gant ar vezh 'ta, mic'hiag !

Ha koulskoude n'in ket, hag e lavarin perag ; ha ne vin ket pell oc'h ober, pe vefoc'h a ad labour ewid ma vo teoget ha plijet daoulagad ar sellerien ger, kea.

Hag ar yezh a gaosee an dud-se ? Hag a zo, din da c'houzoud, bew' taw er Vro Vigoudenn ? Pessort yezh, emezoc'h ? Gallez bras, pa lavarin mad. Na c'hwi ne weloc'h farsite ebed o klevet Bigouterien penn kentañ 'r c'hantved o chaokad begadoù gallez bras ha flour ? Mad, din-me 'vo fallaez blas va begad netra nemed gant se. Netra nemed... Tribledie, med a boues bras eo din. Petra a gont deomp ; dilhad ha diavaesoù evelse ? Peotramant ene bew hon bro ? Kollet an aour ewid ar c'hwes anezañ.

Ne ran ket foudre kær ne vefe ket getlet kavoud ur Bigouter yaouank da datouilhad brezhoneg e-gis ma faot. N'o doa nemed soñjal en afer-se en araog, ha pemp bloaz pe c'hwec'h goude, 'vefe kavet ugent pe dregont bugel gouest da vrezhoneg e doare Paoulltreusig.

Ewidon-me eo ken diwirion ar film, filmet kær ha va vefe, hag eo Goueliou Meur Kernew ha toud ar strobaj dislonk-se. Pik.

Med, kement ha bezañ kaoaset eus yezh hag eus filmoù, e lavarin va soñj war un draig all pe zaou en doare-se. Rag ken diwirion ha sod all e kavan

passé an hanter, hag ouzhpenn, eus ar filmoù a vez tro da weled en tele pe e lec'h all. Netra nemed abalamour d'ar yezhoù.

Na c'hwi ne gavoc'h ket drol klevet an oll dud a vez gwelet enno o sachañ gallez flourro'h eged na gaoseomp, c'hwi ha me ? Pe 'vefent Amerikaned, Japanis, Romaned eus amzer Kaeser, Vikinged pe... Bigouterien.

Kement-mañ a ziskouez pegen bouilhennet oc'h bet gant an estetik marc'had mad-se. Na ped gwech e weloc'h evelse o varvailhad assambles tud n'oa yezh vourin ebed etreso ! E pelec'h em ar jubennour ?

C'hwi lavar e vefe diaes bras, ne vefe ket kavet tud awalc'h da gaosee yezhoù 'zo. Pezh kær! Na ped gwech e vez gwelet o c'hoari assambles aktourien ez eus sur unan pe veur a heni anezo na gaosee ket en natur ar yezh a glewoc'h ganto. Anad deoc'h ez eus bet labourer war ar son goude-se.

Herwez klevet, ne vez gwaerit morse e-gis all en Itali... memes ar film « L'arbre aux sabots », sañset dezañ bezañ filmet en ur ran-sañset dezañ bezañ filmet en ur rannyezh, eo bet gwaerit ar vandenn gomzoù anezañ el labouradeg da c'houde !

N'eus nemed ar paourkaezh genouien, doganet an istor evel Indianted ar westernoù, hag a gaosee fall... N'oc'h ket souezhet e distripiet oll ar memes saosneg droc'h ?... Pa 'z eus etreso regont yezh ken disheñvel ha me'o brezhoneg ha russianeg ! Kouñsionoù toud, va zudou vad.

Klemm a ra lod iwe n'eo ket maout war ar yezhoù ar paourkaezh Fransisien. Anad deoc'h e vez gwaerit espres kær... Ne welit ket e tlestant ar bennag all, evel m'omp bet ni lakaet en desped deomp da asezañ war hon brezhoneg.

Ar respont eo bezañ istitlet toud ar filmoù-se, ha mad pell zo. Diaes ? Dibossubi ? Dic'houasivus ? Kit da veur a vro all ha ne weloc'h nemed se. Penaos e kav deoc'h e raont e broioù e lec'h ma vez kaoaset da vad teir pe beder yezh ?

Ha neuse, siwazh deomp, c'hwi 'gav deoc'h e kompren peb tra en tele ar Fransisien gallez a zo abanomp ? Me, da vihannañ, ne ran ket.

Yezhoù, yezhoù toud. Nag un torr-pean, ya.

Hag ur blijadur iwe ; pa ne glewan nemed gallez war va zro e vezan enoc'h. Ha peadra 'zo !

M. Madeg

# Traou

Ar Vretoned, a-viskoazh, zo bet dedennet — pa n'eo ket plijet ! — gant ar marvailhoù a gontet diwar-benn ar bed all : ar fisikou, an tier satanaset, an drougawel, ha beteg ar c'horriganed hag ar morgane-se... Traou sorser, gis ma larer !

A-drugarez-Doue, ne gred ket kên an dud a hizi er sorc'hennou mod-kozh : panevez ez aont da weled, gwech an amzer, un diskonteres bennag : med ur sorseres n'eo ket, peogwir e klask-hi ober vad deoc'h...

Sorseresed n'eus ket mui anez : achu pelizo gant ar ouenn diaouleg-se ! Beteg goude !

Sellit kentoc'h al lizher degouezet ganin un nebeud misiou 'zo, ha p'edon o kuitaad ma bourc'hadenig a Vreizh-Isel. Postet oa bet er Baol (nepell diouzh Sant-Naser), hag e gallez e oa. Emaon o paoues troñ anezañ e brezhoneg ewidoc'h, lennerien :

« Un bennag en deus kaset ar chadenn-mañ din. Me 'gass anezi deoc'h. Ema 'tont 'eus ar Venezuela, savet gant ul Lyonad. Daw eo dezi ober tro ar bed. Ha pa na vefoc'h na kredennour, na brizh-kredennour, taolit ewezh mad ouzh kement-mañ :

« An Aotrou Prest a ressewas ar chadenn e 1959 : lakaad a reas e sekretoures da sevel 24 diskivadenn anezi hag e lakeas kass aneze : tri dewezh warlerc'h e c'honeze tri milion a lurioù kozh er c'hoari-sac'h... »

« An Aotrou Besnard a ressewas ar chadenn e 1965 : lakaad a rae e sekretoures da sevel 24 diskivadenn, ha kass aneze : diwar an deiz-se e kreskas e stal buan mat. »

« An Aotrou Rolland en doa bet ar chadenn hag a dorras anezi : an tan a grogas en e di, e vaoues hag e seizh a vugale a voe lazhet eno, hag eiv e hunan en deus kollet e skiant-vad. »

« An Aotrou Colet en doa bet ar chadenn hag he zorras dre stlepel anezi d'ar blotoù : naw deiz warlerc'h e oa lazhet en un aksidant kirri-tan. »

« An Aotrou P... en doa disañjet ar chadenn e-barzh an diretenn : koll a reas e labour ! Kavet ar chadenn en-dro, e kasse anezi, ha neuse 'yae gantañ ur vicher gwelloc'h eged an heni 'raog. »

« War zigarez ebed ne zle ar chadenn-mañ boud torret : grit 24 diskivadenn ha kassit aneze : a-benn naw deiz e c'hoarvezo un dra eürus ganeoc'h. »

# sorseres...

Gant mignoniezh...  
Gast ! Setu ase ur mignonij na oa ket gwall wirion !... Ganin ne vez sekretoures ebed, ha ne 'm eus kaset eiskrid ebed da zen ebed : neuse e rankin merwel, ha ma gwreg ha ma fwear a vugale war-un-dro ganin ?

Ankouezet 'm eus lared un dra aboues deoc'h : al lizher ne oa hanw na sinatur ebed warnañ : neuse e soñjis ober klemm ouzh Prokolor ar Republik : ul lesenn zo eneb ar re a gass lizheroù dishanw, da gennig lazhañ o nesañ, na petra !

Kredabl en dije dirollet an Aotrou Prokolor da c'hoarzhin diwar ma c'houst... Ha martese ho-peus-c'hwi kroget d'ober iwe : tewel a ray d'ho fent emicheñs, pa larin deoc'h n'eo ket ar wech kentañ din kaoud bec'h digant sorserien tort-se ; nag an eil, ma soñjan mad... »

C'hoarvezet zo bet ganin, ha pa oan mestr-skol e Breizh, gweled patred pe merc'hed bihan o tont beteg ennon, un tamm paperenn joget etre o bisied ur « chadenn » sorset adarre ! Ha ma c'hrennarded hag aspediñ ananon — a-berzh o mammoù hag o mammoù-kozh — da larin dezze petra ober, goude m'o doa lure da sevel un niverad diskivadennou, goude na oant ket sur da skrivañ braw a-walc'h ewid an aotrouien-hont !

Peurliesañ e vese kaos, en o lizheroù satanaset, eus sent ha santeted an Iliis Katolik. Gant ar vezh ! Ar vezh war ar gristenien fallagr ! Ar vezh iwe war an eskibien na raont mann ebed eneb d'ar re-se : an eskumunigoù zo graet ewid ar re hebken, 'm-eus aon !

Bugale Mari-Robin a vez o redez nos-deiz warlerc'h ar varc'hadourien gwall-lousoù hag a vregn korfou hor yaouankisoù. Med n'eus ket bet kaos gante james da ziskoachañ ar vreinerien speredoù !

Me 'gred e ouson perag : kehid ha ma kollo an dud vunud o amzer o tiskrivañ lizheroù-hud, kehid ha ma vint o krenañ gant ar spont hag an doujañs d'ar santig-mañ-santig, kehid ha ma soñjo dezze n'eus ket med torriñ ur chadenn baper da vout gwalleürus, ha lakaad astenn dezi da vout en o bleud, neuse 'vad, ma lennerien gaëzh, den ne glasko abeg ouzh ar juloded hag an oc'hened a leugn o godelloù diwar c'hwes ha gwad al labourerien...

Erwan Evenou  
d'ar gwener 13 a vis C'hwevrer !!

Setu amañ 100 L ewid adkomanantia da b/POBL VREIZH (...)  
Dalc'hit mad ! Ar stourm ewid ar vro ne ra nemed komañs c'hoazh, gant an trec'h war ar chekennoù brezhoneg er CMB.

Trugarez vras d'hol lenner eus ar C'hanada. Laouen omp o c'houzoud ez eus un nebeud brezhonegerien eno. Gwir eo ne ra ar stourm ewid ar vro nemed komañs. Aet omp avad pelloc'h eged ar stourm ewid ar yezh hebmuiken. Bez' ez eo ar stourm ewid ar yezh darn, un darn a boues, med un darn hebken eus ar stourm ewid ar vro. Gourc'hemennou kaloneg d'hor Breizhad eus ar C'hanada : ewid e vrezhoneg, dont a ra braw gantañ dija. Fiziañs hon eus ez ay c'hoazh war wellaad kaiz gantañ. Dorn-hadorn dalc'himad.

A. Ropars, Kanada  
POBL VREIZH

Merde! C'EST L'PRINTEMPS!  
Youpiiii! C'EST L'PRINTEMPS!

Paperenn ewid gouenn mont e-barzh

Hanw hag hanw-badez .....

Chomlec'h .....

Gouenn a ran moneri e-barzh Unvaniezh Demokratel Breizh

D'an (d'ar) ..... 19

Sin : .....

Da gass en dro (troc'het pe adskrivet) da  
UDB B.P. 304 - 29273 BREST-CEDEX

# POBL VREIZH

## Ster un nac'hadenn

Pa vo en em gavet an niverenn 132-mañ eus Pobl Vreizh dindan daoulagad hon lennerion, e vo kresket c'hoazh ar wres, hag a-wechoù an derzhienn, a zo o lakaad gwad re ar « c'hlass politikel » da virwiñ.

Rag tostaad a ra an dewezh bras ma 'z ay Présidant ar Republik C'hall a-vremañ er-maes a garg. Ewid mont e-barzh en-dro martese : ar « bobl soveren » ra viro ! D'ar 26 a vis Ebrel ema an dro gentañ, d'an 10 a vis Mae an eil tro. A-benn teir sizhun ahann e vo lakaet er-maes eus ar jeu an oll re, nemed daou, a zo o klask ober ton d'ar Frañsision er mareoù-mañ, kement ha prenañ o mouezh diganto...

Komz eus ar « bobl soveren » n'eo, e gwirionez, nemed un doare aes ha berr da dermenañ ar sistem politikel a zo o ren er Frañs. Daoust ha « soveren » eo ar bobl er Frañs ? Kenkoulz eo respont diouzhtu : N'eo ket. Ar re a zo mestr war an traou eo ar bagad tud bodet en-dro da Bresident ar Republik : ar Présidant e hunan, aet da roue, pedost, evel en amzer de Gaulle, ma n'eo ket gwashoc'h, ar C'hentañ Ministr, mewel bras hanwet gant ar roue ha sentus outañ, evel ma sente Colbert douzh Loeis XIV, hag ouzhpenn neuse, tropell kuzh hag oberiant an deknokrated. Ar re-mañ eo ema ar galloud pemdezieg gante, e Paris 'vel e kement korn eus ar Frañs m' en em astenn beteg ennañ skeud mougus Paris.

Epad seizh vloaz ma pad ren ar Présidant, e vez dister pe null roll ar « bobl soveren ». Homañ n'eo mad nemed ewid roiñ he mouezh d'ar Présidant-roue, ha da vezañ maget gant promessaou... Ar Gampr he hunan, ma kaver enni dileuridi ar « bobl soveren », n'ema ase nemed evel klenkadur, evel leurenn memes, mar karer ; leset 'vez ar gannaded da c'hoari pezh war al leurenn-se, d'ober prezegennoù, d'ober tammou reus a-wechoù, med n'eo ket war al leurenn ema ar c'hoari gwirion ; n'eo ket war al leurenn eo a weler en e splannañ nerzh ar galloud politikel : el leurenn-adreñv ema ar pennoù bras, hag alesse eo e kassont en-dro ar margodennoù a vez gwelet war al leurenn-ziaraog.

D'ar 17 a vis Mae, po vo achu gant ar c'hoari bras komañset c'hwec'h mis so pe ouzhpenn, pa vo aet e-barzh ar Présidant newez (pe an heni kozh adbadezet), e krogo en-dro ar jeu kozh, ar Présidant, ar C'hentañ Ministr hag an deknokrated ar c'hoarierien anezañ...

Setu, a-benn ar fin, n'eo ar ger « pobl soveren » nemed ur gomz goullou, un « difetissadur » war ar paper. An demokratelezh e rouantelezh Frañs n'eo nemed ur sac'h goullou, hag eveljust ne chom ket en e sav, peogwir n'eus netra e-barzh.

N'omp ket kustum koulskoude, ni amañ en UDB, d'ober fae war frammoù politikel ar Frañs, forzh pegen dister int, ha forzh pegement a draou faos ha disec'het a gaver enne. Bewech hon eus aliet ar Vretoned da vont da votiñ, meur a heni ahanomp zo bet aet war ar renk da genver ar botadegoù, kement ha roiñ hor mouezh da intent gwelloc'h, ha daoust ha ma vezomp mouget gant ur sistem hag a zo brein e gwirionez.

Brein eo ar sistem da gentañ dre ma n'eus er Frañs, sañset, nemed ur bobl, ar bobl a Frañs, hag hi soveren ouzhpenn, sañset. Nann a lavaromp a-grenn d'ar gaou-

se. Ar « bobl a Frañs » n'eo nemed ur gavadenn gwraet gant paotred an Dispac'h tost da zaou-c'hant vloaz so bremañ. Gwraet eo ar Frañs gant meur a bobl e gwirionez : bez' e kaver er Frañs Bretoned, Korsis, Oksitanis, Elsassis, hag all, hag iwe Galloued. N'eo ket abalamour ez eo ar re-mañ an niverussañ eo e tleer diverkañ ar re all. Ar « bobl a Frañs » n'eo nemed un termenadur bet savet gant gwiraourien an Dispac'h, o sevel ur « bobl a Frañs » evel ma oa, sañset, ur « bobl roman ». N'omp ket, ha ne fell ket deomp bezañ karc'hariet gant gewier ha kavadennoù pompadus an istor. Ha diwar ar gewier-se eo e vew hag e kresk ar « c'hlass politikel ». Biskoazh n'omp deuet a-benn da lakaad paotred an tu kleiz gall, ha ni e darempred pemdezieg gante, da anzav e oa hag ez eus eus pobl Vreizh. Rag bez' e chom an dud vad-se bugale feal ha leal d'an Dispac'h Gall. Un Dispac'h bourc'his memestra, pa vo lâret mad. N'eo ket nec'het bras re ar PC, ar PS, an MRG hag all gant an heritaj bourc'his-se...

Ma ! Ni amañ zo lakaet diaes gantañ. Hag ouzhpenn lakaet diaes omp : ne fell ket deomp henn degemer. Dre ma 'z eo bourc'his, ha dre ma tiverk, dinec'h-käer, hon personelezh-ni hag hor boud-ni a bobl distag. Eveljust, en ur gomz e-gis-se, e plantomp ar c'hleze e korf ar sistem. Dispac'hel eo a-dra-sur un emzalc'h sort-se.

Dre ma 'z eus eta eus pobl Vreizh, dre ma n'omp ket deuet a-benn da lakaad da vont war ar renk ur c'handidat o komz en hanw pobloù gwirion ar Frañs (DOM-TOM hag all), dre ma fell deomp stourm dalc'hmad ewid emrenerezh sokialour hor pobloù, hag heni pobl Vreizh er c'hentañ penn peogwir e komzomp en he hanw, er wech-mañ eta e roomp an ali-mañ d'ar Vretoned : chom heb votiñ pe votiñ gwenn d'ar 26 a vis Ebrel, dewezh ar mouezherezh ewid an dro gentañ. Heni ebed eus kandidated an tu kleiz gall n'en deus adsammet hor c'hoantoù-ni. Ar gwellañ emzalc'h neuse, peogwir ema an traou er stad-se, eo diskouez, dre hon nac'hadenn, breinadur ar sistem. Bez ez eo hon emzalc'h un emzalc'h emren hag emrener. Emren eo, peogwir ne fell ket deomp bezañ dalc'hmad lost ar c'harr kleiz gall. Emrener eo, peogwir e tiskouezomp e-gis-se ne lakaomp ket banniel Breizh en hor godell.

Eveljust, pa vo aotronez ar Minister Diabarzh oc'h ober ar c'hontchoù, ne vo ket gwraet hanw eus nac'hadenn emrenerien Vreizh. Mesket e vo hor pape-rennoù-votiñ — ewid ar re ahanomp a voto gwenn —, e-barzh bern disurzhiat ar pape-rennoù null. Ne vern. Ne vo ket bet mouget hor mouezh a-grenn. Ur re ben-nag e Breizh o devo hi klewet. Hir eo an hent a gasso hor pobl d'an emrenerezh. N'eo ket ar skoilhoù a vanko deomp warnañ. Red eo kemer penn an hent-se evelkent !

